

Konskried Sant Nikolas

Plinn – *version MB-TAV- Modèle Ronan Guebleiz et Marthe Vassalo*

Ar **bempvet** devezh warn ugent **dimeus** ar viz genver
Kalonad me am boa bet deus ma gwele sevel

Kalonad me am boa bet **deus** ma gwele sevel
O soñjal e-barzh un devezh pezhani am boa da dremen

(nag) O soñjal e-barzh un devezh pezhani am boa da dremen
Met allas a-benn a oa noz me am boa bet anken

Me a **bartias** deus ar gêr ne oan ket **gwall** diwezhat
Ar **c'hentañ** kêr ma antrezemp e oe e Zant-Nikolas

Ar **c'hentañ** kêr ec'h antrezemp e oe Zant-Nikolas
Na didostaet mat d'ar c'houvi dindan an doenn mein-glaz

E Zant-**Nikolas** pa oamp erruet ni a oa digemeret
Gant paotred al livitenn, **re** an tokoù trouset

A pa oa lañset un ordr, ha **stennet** an drapo
O na da **gentañ** `vit komañs tennerezh ar maerioù.

Ha neuzen e teue war-lec'h, **tro** ar paotred yaouank
Pephini a na denne dre ma `c'h arrias e renk

Ha pa oa erru ma renk da denno ar bilhed
Ma c'hamarad `denne unnek , me a denne daouzek.

Ma c'hamarad a denne unnek , me a denne daouzek.
Soudarded en asurañs, partien a zo ret.

Met `vit tenno ar bilhed, **netra** ne vije **goueret**
Ken e vez tremenet ar revu na diwar ar gañfarded

Ken e vez **tremenet** ar revu na diwar ar gañfarded
Darn anezhe a zoug ar mañsion, re all a vez reformet

Na pe oa tremenet ar revu, soudarded e oamp hon-daou
Nimp o `hont da diez gant ar ru da glask an trikolorioù

Hag ar **rest** dimeus an hañv e vije gwelet o **vale**
Krotouzien kartier Maï-Nan **trikolorioù** gante

Trikolorioù a oe gante na **betek** o rujumant
Evit monet da saludiñ **kapiten**, komandant